




PA DEUY AN HANV




'N eun draonienn a Ger - ne Lou re di



ra di ra la li re di. 'N eun draonienn a Ger-



ne, E - man va c'ha-ran - te, E - man



va c'ha-ran-te, O - o ! E - man va c'ha-ran-te

'N eun draonienn a Gerne,
Lou re di ra di ra la di re di,
'N eun draonienn a Gerne,
Emañ va c'harante,
Emañ va c'harante,
O, o !
Emañ va c'harante.

Triouec'h vloaz oa Monig,
Lou re di ra di ra la di re di,
Triouec'h vloaz oa Monig,
Pa c'hounezas Yannig (2 wech)
O, o !
Pa c'hounezas Yannig.

Eun devez o foennat,
Lou re di ra di ra la di re di,
Eun devez o foennat,
E pradeier he zad (2 wech)
O, o !
E pradeier he zad.

Bep taol forc'h ha rastell,
Lou re di ra di ra la di re di,
Bep taol forc'h ha rastell,
Outi e rae eur sell, (2 wech)
O, o !
Outi e rae eur sell...

Pa gano ar voualc'hig,
Lou re di ra di ra la di re di,
Pa gano ar voualc'hig,
En uhelañ brankig, (2 wech)
O, o !
En uhelañ brankig,

Deut holl ha deut timat,
Lou re di ra di ra la di re di,
Deut holl ha deut timat,
D'eun eured kernevat ! (2 wech)
O, o !
D'eun eured kernevat !